

Gavotte Ton simple :
Jean-Louis ha Marivon (Voiajet 'meus e Bretagn)

*Ni zo deut d'ar fest-noz gant ur galon laouen
Ha ma 'vez ket dañserien marteze vo chouchen
Hag ouzhpenn 'vo chistr ha gwin ya gant krampouz lardet
Ha war-lec'h ar c'horvad-se da gano veomp barek*

la la la lalela, la lala leno.....

Voiajet meus e Bretagn, er c'herioù, war ar maez
Ha bremañ on deut a-benn, d'ober ma ziegezh

Ha bremañ on deut a-benn d'ober ma ziegezh
A ne vank netra ennan, met ar briadelezh

Bet on bet e Treglamus tri miz ti ma merer
Hag oc'h ober labourioù, kaven berr an amzer

Bet e eus bet plijadur, a bep tu d'ar c'hontre
Anveet ur femelenn a oa eus ma doare

Kentañ ma bet an enor da welet ma mestrez
Oa d'ur sulvezh d'abadaez, da ze(iz) gouel ar Werc'hez

Eno 'moa he remerket, he daoulagad brilliant
Ha me 'moa he referet war an holl verc'hed yaouank

An eil gwech a oa din-me da welet anezhi
Oa ur nozvezh goude koan, barzh an osteleri

Ha pa selen deuzouti, kaven dezhi un aer vat
Ha pa c'hoarzen dezouti, rae din ur serr-lagad

Ha me a soñje neuze oamp gant Doue chouazet
Evit bezañ uniset, da vezhañ daou bried

Ha me a c'houle neuze en ur distrei andro
Peseurt micher rae ar plac'h, penaos oa h'ec'h ano

Ha respontet e oa din gant ma brasañ mignon
Oa ur venajerez vat hag ur plac'h a-feson

E oa ur venajerez vat hag ur plac'h a-feson
A da zeiz he badiant, oa anvet Marivon